

kannadig keltia

lizher-kelaouiñ embannet gant skourr breizh ar c'hevre keltiek

Niv. 5

NEVEZ - AM ZER I 9 810

3 Lur

B R O - S K O S E K R O A Z A N H E N T O U


Yud e oa an avel e Din-Edin d'ar Iañ a viz Meurzh. An deiz-se o doa dibabet 400 a vrogarourien evit en em vodañ dirak ar savadur a vefe deuet da Vezañ Parlament emren Bro-Skoz ma vefe bet trec'h an "Devolution". Lamm a oa bet roet d'an emrenerezh avat, daou vloavez rik kentoc'h, ha n'eus nemet un ti goullo eus savadur Calton Hill. Kannaded Bro-Skos n'eus ket anezho e-barzh; spesou-kannaded ne lavaran ket. Hag an avel yud a skigne komzou ar brezegerien a-us da doennoù ar gêrbenn.

En un enkadenn emañ an SNP, anezhañ Strollad Broadel Bro Skos. N'eus nemet 18 % bennak eus ar voterien, a heuilhfe c'hoazh e linenn bolitikel. Un nerzh a-bouez a zo dezhañ koulskoude, pa soñjer n'eus ket kalz muioc'h a dud o votiñ evit ar Strollad Komnour Gall da skouer. Met war gil eo aet, n'eus ket da nac'h, rak n'eus ket ken pell-se c'hoazh e vote ur Skosad diwar tri evit tud ar strollad brogar. Pa c'hwezhe avelioù ar c'hresk ekonomikela-du gant Bro-Skos e rae berzh ar strollad. Met bremañ gant an dichal eo aet e levezon war wanaat. Diwar ar c'hentañ gwel eo souezhus ar cheñchamant-mañ ; blenerien ar strollad o-unan ne ouzont ket re vat war be du treiñ ha war a laverer e c'hellfe an divizoù bezañ tenn da geñver bodadeg-veur an SNP hag a vo dalc'het e Miz Mae a-zeu. Koulskoude disoc'h ur votadeg darnel bet dalc'het nevez'zo er Strathclyde a zo deuet dres war ar pik evit reiñ kalon dær vrogarourien : 35% eus an dud o doa votet evit an SNP. Ha sin kentañ ar chal e vefe ?

Dipitus a-walc'h eo ar c'heuloù war dachenn ar gouzelegivez. E Miz C'Hwevrer e oa bet kinniget da gannaded parlament Londres reiñ ur seurt statud divyeshk da rannvroioù gouzelek Bro-Skos. Gant Ronald Stewart, hag eñ kannad SNP inizi ar C'Huzh Heol, e oa bet kaset an traoù war-raok. C'Hwitet en deus war e daol avat daoust d'e ginnig bezañ berrik. Tri zra dreist holl a oa bet goullennet : 1) Resisaat da vat bevennou gouzelegva Bro-Skos 2) Ar gwir d'en em zifenn e gouzeleg dirak al lez-varn 3) Sevel ur c'homite a rafe war-dro an abadennoù rádio ha tele. Nac'het o doa an darn vrasañ eus ar gannaded votiñ a-du gant an danvez-lezenn-se. En devezhioù war-lerc'h ez eus bet gwelet e-leizh a banelloù-hent hag a oa bet mastaret gant peñtur. Ur strollad nevez, "Ceartas" ("justis") e anv, en deus diskleriet d'ar c'hazetennou e raio e seizh guellañ evit enebiñ ouzh emzalc'h mezhus gouarnement Bro-Saoz. Kemenn a rae ul lizher bet kaset d'an "Aberdeen Press and Journal" e vo diskaret peulioù-skings a-benn nebeut.

Jorj GWEGEN
c'hwech bro, ur stourm!

STAGADENN DA gCARN



gant ALAN HEUSAFF

Un teod lemm a gave abeg nevez 'zo em fennadoù peogwir e vez anv ganin dalc'hmat eus Iwerzhon. Gwir : an dachenn a anavezan ar gwellañ eo. Dav vo din teuler pelloc'h ma sellou hogen ar wech-mañ c'hoazh n'on ket evit mirout a gomz eus ar vro-mañ. Eus he neptuegezh e-keñver ar bloc'h ou milourel° e vez kalz kaoz d'ar mare-mañ

A.H.

Abaoe m'he deus gounezet Iwerzhon he frankiz politikel he deus dalc'het d'an neptuegezh°. Keit ha ma chom nerzhioù armet Bro-Saoz en ur c'horn eus ar vro n'hell ket kevrediñ° ganto evit en em zifenn rak kement e vefe hag anaout ez eo digemmus an harzoù etre an div stad. Anaout a ra Iwerzhoniz koulskoude e laz d'ar Saozon diogelaat tu ar c'hornog eus Breizh-Veur : gouestlet en deus atav gouarnamant Dulenn herzel oush an neb a glaskfe implij tiriegezh ar 26 kontelezh evit argadiñ an enez amezek. Daoust d'he neptuegezh e-pad an eil brezel-bed e oa kosteziet-mat ar Stad iwerzhonat diouzh tu ar Saozon. Fur e oa, rak ar re-mañ o dije kavet laouen digarez da adaloubiñ ar vro.

Hep mar emañ an darn vrashañ eus poblañs Iwerzhon hiziv an deiz a galon pe dre berzh o c'henuerzh, a-du gant ar "C'Hornog". Betez hen evelato ez eo bet miret sturienn De Valera : chom er-maez eus emglevioù-difenn. A-drugarez d'he neptuegezh° e c'hell ar Stad-mañ c'hoari ur roll etrevroadel pouezus, o harpañ da ziwall ar peoc'h e meur a lec'h dre ar bed. Mar dafe a-du gant ar galloud-mañ-galloud e kollfe fiziañs pobloù an Trede Bed, ne vefe ket degemeret da dredeog° ganto.

Hag int oc'h aliañ mont e-barzh ar Gumuniezh Armerzhel Europat e tisklerie c'hoazh renerien an daou strollad bras, Fianna Fail ha Fine Gael n'en em uestlent ket da politikerez ar Stadoù-izili all war dachenn an armadur°. Met anat eo abaoe daou pe dri bloaz ned int ket ken postek-se mui. Ma vez unanet "Europa" ent politikel, o deus lavaret e vo prest Iwerzhon da sammañ he dlead e-keñver en emzifenn. (Emzifenn a zo dereat, met evit en em zifenn e kav d'an nen a-wechoù e tle tagañ da gentañ. Gwelit R. Reagan ha M. Thatcher o kinnig kas ur nerzh-emell da Bleig-Mor Persia ...)

Da heul an divizoù a zo bet etre kentañ ministred ar "Rouantelez Unanet" ha Republik Iwerzhon e derou miz Kerzu, e-sell da gavout un diskoulm politikel da gudenn Norz-Iwerzhon, ez eus savet strafuilh ken e-touez al Lealourien hag e-touez ar re a fell dezho e chomfe ar Republik er-maez eus kement kevredad milourel. Rak karget ez eus bet bremañ kefrididi eus an daou c'houarnamant da studiañ an holl ziarbennou° a c'hellfe bezañ graet evit kaout peoc'h hag aotreet int da adsellout oush kement neuz eus an darempredoù etre an div Stad. Ha kaoz a vo 'ta eus un emglev-difenn etrezo ?

Ar Saozon a garfe sachañ ar Republik e-barzh o c'henreizhad-emzifenn°. M'o deus engouestlet kement eus o nerzhioù e Norziwerzhon ez eo dreist-holl evit abegoù strategek°. Abaoe

ar 16vet kantved e sellont ouzh Iwerzhon evel pa ve o forzh-a-dreñv a rankont kontrolliñ ent milourel° gant aon e teufe o enbourien (Spagnoled, Frañsizien, Alamaned) e-barzh. Bremañ ma'z eo kreñv-meurbet ar Rusianed war vor ha dindan vor, ez eo ken difraeüs ha biskoazh pouezañ war Iwerzhon d'ober emglev. Ne vo graet marc'had ebet a-zivout Norziwerzhon anez un emouestl start a-berzh gouarnmant Dulenn da gemer perzh en un aozadur-emzifenn. Daoust hag ez eo aet Haughey betek kinnig ar seurt-se emglev hep bezañ gounezet digant e genbrezegerez un emouestl spis da adunanif Iwerzhon ? Emglev Roma n'eus netra ennañ a-zivout difenn ar Gumuniezh Armerzhel Europat. Met deut eo bremañ ar boaz gant ministred an dek bro da gaout kenbrezegou "e skeud" o bodadegoù-kenvarc'had a-zivout diar-bennoù milourel°. Iwerzhon an hini nemeti eus ar broioù-se ha n'emañ ket an Aozadur an Emglev Norzatlantel. O chom er gompagnu-nezh-se, ha pa ve hep rannañ grik (?), emeur moarvat o kas boazañ pobl Iwerzhon ouzh ar menoz ez eo perzhiek ar vro-mañ en un emglev-difenn gant ar re-se.

Moarvat emañ an darn vrasañ eus ar bobl a-du gant ur meni-neptuegezh. Emzalc'h ar strolladoù politikel a zo arouezius er c'heñver-se. Strollad al Labour (ha n'eus dezhañ nemet ur c'han nad dre eizh en Dael) a brezeg groñs an neptuegezh°. Fine Gael n'eo ket gwall-sklaer e leviadurezh : e rener, Garret Fitzgerald, zo un "Europad" hag e penn ar gouarnamant e lavarfe ya diouzhtu d'un Emglev-Difenn etre izili ar Gumuniezh Armerzhel Europat. Ur c'hevvezor dezhañ, Richie Ryan, a brezeg fraezh avat a-du gant chom neptu hag er-maez eus kement kevredad milourel°. Fianna Fail, diazezet gant De Valera, a chom an darn vrasañ eus e harperien feal d'an Den Meur met barrek eo ar re a zo bremañ e penn ar strollad da ziskouez ez eo kemmet ar plegennou. Ma vefe da zibab etre adunanif ar vro ha chom neptu, e vefe prest ur c'halz eus an harperien-se da zegemer un emglev milourel° gant Bro-Saoz. Gwazh a se ma vez buket neuze fuc'helloù° ar Rusianed war aerborzhioù Shannon ha Dulenn pe war borzh-mor Beanntrai !

ALAN HEUSAFF

GERIOU NEBEUT ANAVEZET°: ARMADUR : armement / DIOGELAAT (pe : GWARANTIN) : garantir / DIARBENN : obstacle / FUC'HELL : missile (FUC'HAÑ : souffler de colère) / KEVEZER : rival / KEVREDIN . (s') allier / KENREIZHAD-EMZIFENN : système de défense / MILOUREL : militaire (adj.) ; ENT MILOUREL : militairement (ur MILOUR : un militaire ; ur SOUDARD : un soldat) / NEPTU : neutre ; NEPTUEGEZH : neutralité / STRATEGEK : stratégique / TREDEOG (pe : HANTEROUR) : médiateur, arbitre.

UR FILM IWERZHONAT

Un emglev sevenadurel a zo etre Bro-C'Hall hag Iwerzhon hag a ro tu da hounnezh da vrudañ he sevenadur ha da ledañ he yezh er vro-mañ. N'ouzon ket petra he deus gounezet houmañ diwar an emglev-se betek-hen. Aozet e vez filmoù gant komzoù iwerzhonek hag a dalvezfe bezañ diskouezet en estrenvra. Da skouer "Poitin", diwar-benn floderien hini-kreñv. Radio Televis Eireann he deus dispignet iveauz ur bern arc'hant evit aozañ ur film bras diwar levr brudet James Plunkett "Strumpet City". Diskouez a ra an tennderioù hag ar c'habaduiloù a sav da heul harzoù-labour dispi etre 1907 ha 1914. Peogwir ez eo gant FR3 o deus Breizhiz da bleidiñ, daoust hag e talvezfe ar boan da gevredigezhioù goulenn ouzh ar gompagnunezh-se feurmioù "Strumpet City" ? Ma ne vefe ket taolet evezh ouzh o gou-lenn, e vefe mat da RTE hen gouzout.

A.H.

ARC'HANT UL LOTIRI VRAS O SKOAZELLAÑ AR SKOLIOU KEMBRAEK

Emañ an "European Cultural Foundation", anezhi ur gevredigezh staliet en Amsterdam, o vont da skoazellañ skolioù babiged Bro-Gembrae. Pariadennoù war ar matchou fobal hag iveau lotiri vroadel an Izelvroioù a zegas arc'hant da gefioù ar gevredigezh-mañ hag en he c'harg emañ skoazellañ gant yalc'hadoù an dud hag ar strolladoù a ra ul labour talvoudus war dachenn ar sevenadur hag hini ar skiantou. 15 milion a lurioù nevez he deus da ingalañ bep bloaz evel se. 10.000 a lurioù saoz (da lavared eo 100.000 a lurioù gall a-vremañ) o deus kavet Kembreiz en o yalc'had. Ar wechkentañ eo da skolioù Bro-Gembrae resev ur skoazell-arc'hant a-berzh ur vro estrañjour.

Graet e vo gant ar prof brokus-mañ evit harpañ tri enklask diwar-benn ar vugale vihan a vez kaset d'ur skol gembraek ha na gomzont nemet saozneg er gêr gant o zud. Resisaet e vo petra int deuet a-benn da zeskiñ pa vez tapet o femp bloaz ganto. Kasket e vo diskoulmañ kudenn ar c'hlasou iveau ; peseurt dibab a vefe an hini gwellañ ? ... lakaat mesk-ha-mesk er memes klas ar vugale na gomzont nemet saozneg er gêr gant ar vugale o tont eus familhou kembraek ? pe neuze dispartiañ anezho ? Kement-se a dlefe rentañ servij bras da vistri ar skolioù kentañ derez iveau evit reiñ da c'houzout dezho peseurt traoù o deus desket ar vugale vihan er skolioù babiged.

Setu ur chomlec'h mat evit Diwan iveau. Duzh an nor-se ne vefe ket skoet en aner marteze a-walc'h.

POBLAÑS IWERZHON O VONT WAR GRESK

Kresket eo poblañs ar Republik abaoe 1971 : 390.000 a dud muioc'h a zo bet kavet da gefñver niveradeg 1979, da lavared eo 13,1 % a dud ouzhpenn en ur ober 8 bloaz. Bihanaat a ra kalz niver an Iwerzhoniz a ya da Vro-Saoz pe da Vro-Skos da labourat ken fall maiz eo stad an ekonomiezh eno. Troet eo kalz tud divroet d'en em staliañ en-dro en o bro c'henidik zoken.

50vet NIVERENN AR GELAOUENNIG HOLLGERNEVEUREK "A N G A N N A S "

E 1976 e oa bet roet lañs d'ar gelaouennig hollgerneveurek "AN GANNAS". Ingali eo deuet er-maez abaoe. Dre ofset e vez liestennet bremañ. C'Hwec'h pajenn nemetken a zo dezhi. Dister eo he neuz a dra sur ; evel se koulskoude e vez pourchaset danvez lenn bep miz. Ur bajennad aes da gompren savet a-ratozh evit an deraouidi a vez kavet bep gwech, hag iveau keleier, istoriou ha traoù da zigrizañ penn al lennerien. A-hend-all embann a ra "An Gannas" ul "Lyther a Vreten Vyghan" (ul lizher eus Breizh) diwar bluenn Ken George, hag eñ o chom du-mañ. Displegañ a ra en e lizher bet embannet war an niverenn 50 penaos e vez savet eiltiez e pep lec'h ha n'eus forzh pelec'h a-hed Aodoù Breizh, hag ar paour-kaezh den a zo oc'h ober un droïg pourmen n'eo ket evit gouzout ken e pelec'h emañ : "y'n dre po y'n pow" ... e kér pe war ar maez ! N'eo ket ni a lavaro ar c'hontrol !

MUIOC'H A DOURISTED E BRO-GEMBRE ER BLOAZ-MAN ?

200.000 a dud pe war-dro o deus goulenet titouroù pe levrioùigoù-bruderezh digant burevioù-touriste lezh Bro-Gembrae e miz Genver. Kreiz miz Meurzh a oa bet ret gortoz warlenn evit ti-zhout 200.000 a c'houlennoù.

Emren eo Galisia abaoe ar 2I a viz Du I980 ; evit gouzout hiroc'h diwar-benn ar referendum a oa bet dalc'het eno warlens e c'heller lenn ur pennad-skrid war "Breizh" niv. miz C'Huevrer ("La Galice, un nouvel exemple d'autonomie", gant Yvonig Gicquel). Warlerc'h c'hwitadenn vantrus votadeg an "devolution" e oa bet dedennet bras kazetennou Bro-Gembre gant an darvoud-se. War ar "Western Mail" e oa bet taoiennet Galisia evel "ur rannvro geltiek eus Gwalarn Bro-Spagn" ("referendum in Spain's Celtic region of North-West Galicia"... W.M. 22.I2.80). Ha pelloc'hik er skrid e oa displeget penaos e vefe moaien denc'hel en e blomm "sevenadur keltiek kozh" ar vro a drugarez d'ar statud emren ("... keep alive its ancient Celtic culture and its language from which Portuguese is derived"). Gwelout a reer eta n'eo ket e Breizh nemetken e vefe kavet tud prest da lakaat Galisia e-touez ar broioù keltiek, daoust da Ifan LLoyd bezañ skrivet n'eus nemet du-mañ e kavfed tud o krediñ kement-se (s.o. e bennad-skrid e niv. ziwezhaf "Kannadig Keltia")

War un dachenn da nebeutañ e seblant bezañ asur ar gerentiezh etre Galisia hag ar c'hwec'h bro geltiek : hini ar sonerezh pobl. Troet a-walc'h e vefe ar Vretoned zoken da weled e sonerezh Breizh muioc'h a berzhioù boutin gant Galisia eget gant Bro-Gembre da skouer. Met n'emañ ket kont evel se hervez ur pennad-skrid bet tennet diwar "La Dépêche de Toulouse" (27.I.81) hag a zo bet kaset deomp nevez 'zo gant ul lenner. Ur pennad-burutellañ a zo anezhañ. Displegañ a ra Claude Coatp e soñj ennañ diwar-benn ur bladenn c'halisian "Foliadas das rias baixas" deuet a-zindan gwask ar "Conservatoire Occitan" en e rummad "Musiques ethniques du monde", ha setu pezh a skriv :

"En musique populaire, la parenté avec le nord du Portugal est évidente (même cornemuse, par exemple), des emprunts réciproques avec les provinces voisines s'imaginent aisément (jeu du tambourin asturien, par exemple), mais il est plus difficile d'y voir un quelconque rapport avec la musique du monde celte (Bretons, Irlandais, Ecossais) dont les Galiciens se réclament sur le plan des origines ethniques"

"... diaes gweled ul liamm bennak gant sonerezh ar bed keltiek". Ma ! setu skubet naet ha propr al leuren ! E-touez an holl arguzennou a-du gant keltiegezh Galisia, n'eus hini ebet a vefe asur penn-da-benn e gwirionez !

Evit pezh a sell ouzh orin gerioù yezh C'Halisia bremañ e vo kavet amañ da heul ul lizher hon eus resevet digant unan eus lennerien ar gazetennig-mañ.

UN NEBEUT EVEZHIADENNOU DIWAR-BENN GERIOU AR GALISIANEG

" Da heul ar pennadoù niverus a zo bet embannet war gCarn ha war gKannadig Keltia a-zivout kudenñ c'hGalisia (daoust hag eo Galisia ur vro geltiek pe get ?) e skrivan deoc'h un nebeut evezhiadennoù diwar-benn ar pennadig embannet war niverenn 3I Carn (autumn 1980), "A short Gallego etymologic vocabulary" e anv.

I5 ger galisanek ("gallego" eta) a zo diskouezet ennañ evit diskouez pegen tost int da c'herioù keltiek.

Me n'ouzon ket galisaneg met un tammiq spagnoleg a ouzon (a-walc'h evit beajifñ e Bro-Spagn pe evit lenn kazetennou pe levrioù ur wech an amzer) hag em c'herz ez eus ur geriadur spagnoleg (pe gastilhaneg ma kavit gwelloc'h) : an "Diccionario Ideologico de la Lengua Espanola" gant "Julio Casares, de la Real Academia Espanola" embannet e 1959 e Barcelona e ti "Editorial

Gustavo Gili S.A." Furchet em eus eta er geriadur-mañ ha kavet em eus koulz lavaret an holl c'herioù meneg e pennadig Carn gant an hevelep ster dre vrás. Setu al listenn :

| <u>GALISIANEG</u> | <u>SPAGNOLEG</u> | | <u>GALISIANEG</u> | <u>SPAGNOLEG</u> |
|---|------------------|------------|-------------------|-------------------|
| I) BAUL | BAUL | heñvelster | 8) LEGAMO | LEGAMO heñvelster |
| 2) BERRO | BERRO | " | 9) LLERDU | LERDO " |
| 3) DUCHO | DUCHO | " | IO) MEL | MIEL " |
| 4) EGUNALDU | AGUINALDO | " | II) PARAR | PARAR " |
| 5) FLECHA | FLECHA | " | I2) SOGA | SOGA " |
| 6) GAGO | GAGO | " | I3) TERCO | TERCO " |
| 7) GORO (ar ger-mañ hepken n'emañ ket em geriadur) | | | I4) TROCO | TROZO " |
| | | | I5) ZURDU | ZURDO " |

Al listenn-mañ a ziskouez eta pegen tost emañ ar galisianeg hag ar spagnoleg an eil ouzh egile met - anez lavarout ez eo ar spagnoleg ur yezh keltiek ! - ne ziskouez kerentiezh ebet etre ar galisianeg hag ar yezhoù keltiek "

B. K. (4.I.8I)

I88I-I98I : UR C'HANTVET DEIZ-HA-BLOAZ A-BOUEZ EVIT MERC'HED ENEZ-VANAV

Kalz abretoc'h eget e Bro-Saoz o doa kemeret perzh merc'hed Enez-Vanav en ur votadeg : 37 vloaz a-raok ! Ken strizh e oa bet aozet al lezenn nevez avat ma ne oa bet nemet 700 maouez o votiñ e mouezhiadeg vrás I88I : ret e oa evit se bezañ dizimez, pe intanvez, pe neuze ... kaout madoù e-leizh ! E penn a-raok ar broioù modern edo an enezenn d'ar poent-se forzh penaos ; morgousket eo chomet da c'houde avat ! Ret e voe gortoz 40 vloaz ouzhpenn evit gweled gwellaennoù all, da lavared eo evit lezel ar voterien da zilenn merc'hed. E I933, evit ar wech kentañ, e voe dilennet ur vaouez gant he c'henvroidi evit mont da barlamant an enezenn. Abaoe avat n'eus bet nemet 7 maouez er parlament betek an deiz a hiziv. War-lerc'h Bro-Saoz emañ Enez-Vanav bremañ evit pezh a sell ouzh gwirioù ar merc'hed. Da heul ganidigezh ur bugel da skouer e vez graet nebeutoc'h eget e Bro-Saoz evit o skoazellañ ; meur a wech ives n'eo ket kement-ha-kement tamm bet goproù ar wazed ha re ar merc'hed ; hag evit ur bern traou all emañ ar vroig-se er penn a-dreñv.

Votiñ a vo gráet er bloaz-mañ adarre, hag emañ servijoù-post Enez-Vanav o paouez lakaat e gwerzh un timbr nevez evit degas da soñj an aotre da vouezhiañ a oa bet roet d'ar merc'hed (d'ar re "a-feson" da nebeutañ) kant vloaz 'zo.

BUGALE E-LEIZH E TIEZ IWERTZHON ER BLOAVEZHIOU DA-ZONT C'HOAZH

"Pet a vugale a blijfe deoc'h kaout ?" An dra-se a zo bet goulennet nevez 'zo ouzh tud yaouank broioù ar Marc'had Kumun. "DAOU VUGEL a blijfe din kaout" o doa respontet an darn vrasañ eus an dud yaouank a oa bet graet ar goulenn-se outo (Bro-Alamagn : 59 % ; Breizh-Veur : 71 % ; Izelvroioù : 66 % ; Bro-zDanmark : 60%)

Kaout TRI BUGEL avat ne blijfe nemet da 17 % eus an Alamagn yaouank, da 19 % eus an Italianed ha da 18 % eus ar Vreizh-Veuriz. E penn ar rummad-se emañ Bro-C'Hall gant 45 % eus ar respondu a-du. Disteroc'h c'hoazh e oa niver an dud yaouank a blijfe dezho kaout PEVAR BUGEL PE MUIOC'H (Hegzagon : 5 % ; Bro-Alamagn : 4 % ; Breizh-Veur : 7 % ; Italia : 4 %). Dindan 10 % emañ an dre-gantad e pep lec'h nemet en ur vro : IWERZHON an hini eo. 56 % eus he zud yaouank o doa diskleriet e karfent kaout 4 bugel pe ouzhpenn.

NOTES DE LECTURE

LANGUES EN DANGER La revue "Parlers et Traditions Populaires de Normandie" publie dans son N° 50 une étude de Jacques Mauvoisin sur l'avenir des petites langues en général et des parlers normands en particulier. L'auteur ne partage pas "l'esprit d'abandon" qui les accable, et nous pourrions nous aussi faire nôtres quelques unes de ses pertinentes réflexions :
" Il y a quelque chose d'extrêmement choquant dans la façon dont "nos contemporains acceptent ainsi de tirer un trait sur un aspect "majeur de notre patrimoine culturel. Pourquoi déploie-t-on tant "de zèle à protéger les vieilles pierres et à sauvegarder les pay- "sages -- ce qu'on a, bien sûr, parfaitement raison de faire -- et "laisse-t-on, dans le même temps, les langages se désagrégner dans "une indifférence quasi absolue ? Est-ce parce que les vieilles "pierres et les paysages sont des valeurs touristiques, ce que le "langage n'est pas ?" Et J. Mauvoisin appelle à "prendre parti" :
" Tant que la langue vit seule, par ses propres moyens, elle ne ré- "clame rien de nous, et la passivité ou l'indifférence ne la gênent "pas ; il suffit que l'on ne soit pas hostile. Au contraire, lorsque "la langue est dans une situation d'infériorité, la passivité ou "l'indifférence lui sont extrêmement préjudiciables : se contenter "de regarder le langage se désagrégner, cela revient à accepter pas- "sivement cette désagrégation"

(PTPN, I4 F. - 21 r. M. Brodon 50000 St Lô / CCP 2407 33 V Rouen)

DISSIDENCE BRETONNE "Strollad Pobl Vreizh - Parti Républicain Breton" nous a fait parvenir sa brochure intitulée "Plateforme républicaine bretonne". Ses auteurs se déclarent "partisans d'une solution de rupture, d'une dissidence véritable". Ils transcrivent comme but l'instauration d'une République Bretonne. Le plus sûr allié de la France, disent-ils, "reste la force d'inertie de nos compatriotes dont l'âme bretonne est ankylosée par l'habitude de penser français". Deux citations, imprimées en gros caractères sur la couverture, donnent le ton. La première est de James Fintan Labor : " La sagesse reconnaît que, dans l'action nationale, la mesquinerie "est plus fatale que la plus folle des témérités : qu'un grand pro- "jet est essentiel pour obtenir un grand effort, une grande énergie, "un grand succès ..."
La seconde est extraite de "Breiz Dishual" de 1911 :
" Quand un peuple a perdu son indépendance, il doit tendre unique- "ment à la reconquérir et ne jamais cesser de la revendiquer"
Une lecture tonique donc, mais accompagnée d'une illustration photographique bien médiocre et d'une introduction bien fumeuse.
(7 francs - SPV, BP 120, Brest cedex)

PAS DE PARDON POUR L'IRLANDE De passage à Paris à la fin février, Sean Mac Bride, prix nobel de la paix et figure de proue de Amnesty International, a accordé une interview au mensuel "Irlande Libre". Nous avons noté ce jugement sur l'antagonisme anglo-irlandais :
" La Grande-Bretagne blame l'Irlande pour avoir inauguré l'effondrement de son empire. La révolution de 1916 est le début du démantèlement, ensuite, ce sera les Indes, l'Afrique, l'Egypte. Ils "n'ont jamais pardonné à l'Irlande d'avoir été à la base du processus"
Homme hors du commun que Sean Mac Bride ! Jeunesse à Paris où sa mère, Maud Gonne, fonde le premier journal "Irlande Libre" en 1898. Père fusillé par les Anglais lors du soulèvement de 1916. Engagement dans l'IRA jusqu'en 1936. Ministre des affaires étrangères de la République. Et aujourd'hui, Amnesty International ; attachement à l'Irlande et inlassable militantisme international

P A R T I S - Au Pays de Galles, le PLAID CYMRU est partagé entre deux tendances. Des militants de plus en plus nombreux considèrent que le jeu politique traditionnel a échoué et que le parti doit s'orienter vers des actions plus radicales. Une autre tendance au contraire considère que le Plaid doit s'en tenir à une stricte légalité et que gagner des votes doit rester son principal objectif.

- Le SCOTTISH NATIONAL PARTY est lui aussi en phase de recherche. Son maximum d'audience a coïncidé avec le boom économique des années 70. Actuellement, les intentions de vote "SNP" de l'électorat écossais stagnent autour de 18%. Le marasme économique ne s'est pas pour le moment traduit par un nouveau bond en avant du parti. Mais peut-être peut-on en trouver un premier indice dans un tout récent succès obtenu en Strathclyde à l'occasion d'une élection partielle : 35 % des électeurs ont voté "SNP", ce qui plaçait le parti juste derrière les Travailleurs.

D E V O L U T I O N Un sondage d'opinion que vient de publier le journal The Scotsman a montré combien Mme Thatcher est impopulaire en Ecosse. Il met d'autre part en lumière que la majorité des électeurs se prononceraient aujourd'hui en faveur d'une Assemblée Ecossaise ; c'est ce qu'ont déclaré 70 % environ des personnes interrogées.

N E U T R A L I T E Un débat passionné agite l'opinion irlandaise en ce moment ; le parti au pouvoir est lui-même partagé : l'Irlande doit-elle s'engager dans un système d'alliance militaire européen ou doit-elle rester fidèle à sa politique traditionnelle de neutralité internationale ? Le gouvernement anglais serait très satisfait de voir la République jouer un rôle dans un pacte de défense européen ; nombre d'observateurs pensent même qu'un tel engagement est la seule façon de conduire l'Angleterre à opérer une révision décisive de sa politique en Irlande du Nord. Mais le gouvernement anglais, pressé par l'extrémisme protestant, est-il en mesure de donner des garanties ? Cet épineux problème est abordé par Alan Heusaff dans la partie en breton du Kannadig.

S H E T L A N D Dans ces îles lointaines, ultimes possessions de la couronne anglaise vers le nord, le sentiment particuliste n'est pas "écossais" mais "shetlandais". Tard annexées par l'Ecosse, Edimbourg leur semble presque aussi éloigné que Londres. La pêche, qui constitue l'essentiel de leur activité économique, traverse une passe difficile. Pour la préserver, les îles réclament avec insistance l'extension de leurs eaux territoriales et elles entendent y parvenir grâce à l'obtention d'un statut d'autonomie qui les affranchirait des contraintes du Marché Commun. Cette lutte est menée par le "SHETLAND MOVEMENT", qui s'inspire de l'exemple de la petite nation voisine : les îles Féroé, autonomes depuis plus de trente ans dans le cadre du Danemark, et qui ont étendu leurs eaux territoriales à 200 milles, comme l'Islande.

E I S T E D D F O D Ce temps fort de la vie culturelle galloise se tiendra cette année à Machynlleth. Cette ville avait déjà accueilli l'Eisteddfod en 1937. Mais les Gallois sont organisés ; déjà, l'on prépare l'Eisteddfod de 1982 qui sera accueilli par la ville d'Abertawe/Swansea (organisateur : J Idris Evans, Swyddfa'r Eisteddfod, Stryd Singleton, Abertawe).

Mieux encore : une manifestation de même caractère prendra place bientôt au Cornwall. Date du premier "Esethos Kernow" : du samedi 5 au samedi 12 mars ... 1983 !

S P O R T En Irlande du Nord, la pratique du sport peut avoir de forts relents politiques. Le "football gaélique" notamment ne plaît pas du tout aux municipalités unionistes, qui n'accordent qu'au compte-gouttes des subventions aux clubs affiliés à la G.A.A. (Gaelic Athletic Association). Ce mouvement, fondé voici bientôt cent ans pour participer par le sport à la renaissance irlandaise, possède près de 3000 clubs dans tous les comtés (y compris ceux du nord, donc), ce qui irrite les extrémistes protestants. La ville de Ballymena, contrôlée par le "Democratic Unionist Party" de M. Paisley, vient d'être le théâtre de sombres tentatives d'obstruction au développement du "Gaelic Club" local.

C I N E M A Un film documentaire gallois, produit par "Harlech T.V." a trouvé un nouvel acheteur pour le moins inattendu : la république populaire d'Albanie ! Ce film dure une heure ; il est consacré à l'histoire et à la culture gaélique des îles Hébrides.

P R I S O N S - Les promesses arrachées au gouvernement britannique tardant à être tenues, le porte-parole des prisonniers républicains du Bloc-H, Bobby Sands, a entamé une grève de la faim le 1er mars. Il a été rejoint le 14 mars par un autre détenu.

- La revue de langue bretonne "SKRID", dans son numéro 25, publie un article où est étudiée la pratique irlandaise du "diskrog-boued" : la "grève de la faim" (littéralement : le "décrochage de nourriture") (SKRID - Ri - Ploare - 29100 Douarnenez)

- Les "Clybiau Gweriniaethol" (Clubs Républicains Gallois - 1 fox Street, Trevarriss, Morgannwg Ganol) diffusent un tract mettant en cause la présence de l'armée anglaise en Irlande, et déclarent : "Un grand nombre de soldats en Irlande sont Gallois ou Ecossais : quels meilleurs soldats l'Angleterre pourrait-elle trouver pour ses propres batailles ? C'est la tactique classique du "diviser pour régner". Les soldats écossais ont été utilisés pour réprimer des révoltes de paysans et d'ouvriers au Pays de Galles au début de ce siècle et avant" Et le tract poursuit : "Assez de travailleurs sont morts pour protéger les intérêts anglais en Irlande."

- Un Comité de Défense des Prisonniers a été fondé pour venir en aide aux Gallois condamnés pour avoir incendié des maisons secondaires. Le comité fait campagne pour la reconnaissance du statut de prisonniers politiques (adresser les dons à : P.D.C. 23 Mountain Rd, Craigcefnparc, Abertawe)

- Et nous, nos prisonniers, allons-nous les laisser s'étioler ? N'est-ce pas leur réaction face à une violence qui les a conduits dans les prisons françaises ? ... cette violence d'Etat qui n'admet pas la Différence bretonne et la vole à l'asphyxie. Demandons leur libération. Ecrivons à nos députés, à nos maires, à tous nos élus pour qu'ils s'emploient à l'obtenir !

ANCIENS NUMÉROS DE "CARN" ENCORE DISPONIBLES

Nous pouvons céder, contre 6 FRANCS PIÈCE (port compris), les numéros suivants :

N° 16 (winter 76/77) / N° 18 (summer 77) / N° 19 (autumn 77) /
N° 20 (winter 77/78) / N° 22 (summer 78) / N° 23 (autumn 78) /
N° 25 (spring 79) / N° 27 (autumn 79) / N° 29 (spring 80) /
N° 30 (summer 80) / N° 31 (autumn 80) /

Il nous reste également quelques années complètes (très rares) :

ANNEE 76. - N°s 13 à 16 : 25 FRANCS

ANNEE 77 - N°s 17 à 20 : 25 FRANCS

ANNEES 76, 77 et 78 - 12 numéros (du N° 13 au 24) : 80 FRANCS
Les demandes, accompagnées de leur versement, doivent être adressées au secrétaire de la branche bretonne de la Ligue Celtique.

!!!!!! Un FEST-NOZ a été organisé le 3 janvier à la salle des fêtes de Lanester, au profit de la LIGUE CELTIQUE et de DIWAN.

!!!!!! Une vente de CARN a été réalisée le 15 février dernier à Guingamp à l'occasion de la Fête de l'Amnistie. Un député du parti basque "Herri Batasuna" s'est montré particulièrement intéressé.

!!!!!! La branche nord-américaine de la Ligue Celtique a réalisé UN CALENDRIER pour l'année 1981. Une langue celtique différente a été utilisée pour chaque mois. Une curiosité : ce calendrier, qui veut innover, débute en novembre 80. "AN OLD WORLD CALENDAR FOR NEW WORLD CELTS". Editeur : M. Burke, 2973 Valentine Avenue, Bronx, N.Y. 10458 - Etats-Unis.

!!!!!! Une bonne nouvelle : un vieux projet est en voie de réalisation. Il s'agit d'UNE CARTE DES SIX PAYS CELTIQUES. Les principaux noms de lieux de chaque pays seront indiqués dans sa propre langue. Nous pensons pouvoir la mettre en vente dans le courant de l'année.

!!!!!! La branche bretonne travaille en ce moment à la réalisation d'une brochure de STATISTIQUES comparatives concernant les six pays celtiques. Mais plusieurs situations de fait compliquent la tâche : la séparation de la Loire-Atlantique du reste de la Bretagne, la partition de l'Irlande, l'englobement du Cornwall dans un ensemble "South-West", sans compter la non-adhésion de l'île de Man au Marché Commun.

!!!!!! L'un de nos lecteurs, Erwan Picard, nous informe qu'il vient d'éditer un recueil de poèmes. Né à Plougescant où il a passé sa jeunesse, il a dû s'exiler à Paris pour travailler. Ses poèmes traduisent son déracinement et sa révolte. Il rêve à son retour, à : " Ce demain différent où dans le ciel carmin / D'une inimaginable et douce matinée / Je confondrai les plans de Dame Destinée / Pour enfin me lancer sur cet autre chemin / ..." Le recueil est en vente, 25 F, chez : Erwan Picard, 12, rue Stéphenon, 75018 Paris.

!!!!!! Le numéro de CARN-PRINTEMPS (couverture verte) est le premier comptant pour 1981. Nous serions reconnaissants aux personnes qui n'ont pas encore renouvelé leur souscription pour l'année en cours de bien vouloir le faire sans tarder.

!!!!!! Nous rappelons qu'il est possible de s'abonner à la revue irlandaise "ROSC" par notre intermédiaire. Cette revue paraît tous les deux mois et comporte des articles en anglais et en gaélique (voir Kannadig Keltia N° 4). Pour s'abonner il suffit de nous adresser 23 F ; nous transmettrons les demandes en Irlande.

!!!!!! Nous pouvons également faire adresser un spécimen du journal IRLANDE LIBRE aux personnes qui nous enverront la somme de 5 FRANCS.

Une coche dans cette case
indique que vous devez re-
nouveler votre souscription



Poent bras eo deoc'h kas ho
skodenn ma welit ur merk
ruz amañ e-kichen.

KANNADIG KELTIA est édité par la BRANCHE BRETONNE DE LA
LIGUE CELTIQUE en supplément à la revue trimestrielle CARN.
Pour recevoir ces deux publications pendant un an, il faut
adresser la somme de 35 FRANCS au secrétaire :
Jorj ABHERVE-GWEGEN - Kerberenes - 29260 LESNEVEN